

(318)

Chanson

Var sujet eur Repas roët gant pevar zen yaouanq.

Var ton :

Tostait oll, tud yaouanc, hac ar re gos ive,
 Erit clêvet ur chanson composet a neve,
 Grêt var sujet ur repas pekini a so bet
 Grêt gant pèvar zen yaouanq, an deyou tremenet.

Unan eus an dud yaouanq en deveus lavaret:
 Tostât a ra Molarje, c'houi so va mignonet;
 Demp-ni da ober frico, va mignonet eta,
 Molarje ne ve caret nemet eur vech ar bloa.

D'an hostalini massa e c'hejont assambles,
 Ma c'houlenjont da goania digant an hostises:
 Ni zo pèvar zen yaouanq so potret sançourci,
 Hac a renq ober cher vad pad an nos en ho ti.

(319)

C'houi a renq hor servicha en hon discretion,
 Eus an traou delicata a zezir ar galon.
 Digasit demp, da gomang, bara mat ha souben,
 Bero demeus ar quella, hac ur podad quin quen.

Ni a renq caout ive socis hac anduillen,
 Hac ur jambon var ar grill, ive teod ur eujen,
 Stripou vo preparet mat, ha goudegennou quen,
 Fars-quinis poaset er form, ha fars bet er zouben.

Beuf-à-la mod ar quella, var ar glaou consomet,
 Lig-loue laget en ragout ha goude preparet;
 Ha ni a renq caret ive un eil antre;
 Ne vanqit get, hostises, da zigas rost goude.

Presantet e voe deze ur c'hoq el les rostet,

Yer, cabonet, eus ar ber, hac ive dindonset,
 Dig masut a voa bet er forn, gant ur hanard fardet,
 Glijuri, qefeleged, ha calz a lapoucet.

Digacit demp, hostisez, ur banne quin bremâ,
 Quin Bourdel ha quin Saintonj, eus an hini quella,
 Quin Spagn ha quin Malaga, quin Artoa, quin Hongri,
 Quin Champagn, quin Langedoq, ive quin Canari.

(400)

Presentet e voe dezze neuse da diservich
 Eus an traou delicata en devoa an hostis:
 Massepain ha Macaron, Tortill ha Carmuzo,
 Gant fouez an excelanta, citronz, per, avalo.

Draje sucret, re fina, figes, alamandes,
 Anjeliq, prun, ha peches, abrico, oranjes,
 Confitur eus ar quella, cerno ha castilles,
 Meulonç eus ar re vella digacet a Londres.

Pa zê quernisset an dol en hon discrecion,
 Me o ped, va mignonet, da gana peb a forn:
 Digassit demp ar musiq da regli hor moerzio;
 Grit c'hoari ar violonç, bombard ha tympano.

Neuse o devez danset certen betec an de,
 Erit lavaret adieu d'an Otrou Molavje.
 Cetu ni divertisset; pèomp ar zonerien,
 Ha neuze ni a velo pegement ar scoden.

(401)

Pa voe aranjat ar gont, ma pigne da gant soed,
 Presentet e voe dezze gant honor ha respect,
 Hac int paea an hostis en eur huanadi:
 Penos e refomp bremâ da gaout da zijuni?

Disesperet o fêvar, ha mantret gant chagrin,
 O velet et o arc'hant ha n'o deus tagen quin:
 Demp bremâ eta d'ar gêr da ober pinijen,
 Da frigassa in dour bervet gant un tamic holen.

Er feçon-se, tud yaouanq, pa vec'h o ribotât,
 Pa ve quin dindan ho peg, oc'h prest tout da bompat;

239

Mes fra ère un tyrant da zigas d'èc'h ho cont:
Neuze 'chomit sebezet, rac eno ma ar spont.

fin.

(Vol. II, pages 318, 319, 400, 401)
15 str. numérotées.

Il y a eu simplement erreur
de ~~numérotage~~ dans le numérotage de
ses pages: la page 400 est au
verso de la page 319.